



RELATION

*Veritabl ha profitabl evit an oll da ober reparation
da Zoue demeus ar sacrilejou ha profanationou a
goumeter a enpe e Vajeste, abalamour d'ar c'hrimou
coumetet er blos-mâ gant pêvar den malürus e parres
Sunt-Georch, tost da Libourn , en escopti Bourdel.*

Var ton Cantic an Eternite.

EN hanô Doue, christenien , tostaît da glêvet
Maleuriou ar re vrassa a zo bet c'hoarvezet
Gant pêvar den dirollet , coumetet er blos-mâ ;
Lacat a reent an eë , an douar da grena.

Qent commanç e c'houlennâñ pardon digant Doue ,
Eus ar Verc'hes gloriis, ar Zent hac an Æle ,
Gant abun rac justic Doue na zeue d'am punissa ,
Va c'halon ouz e gompreñ a zeu d'en em rauña.

Ennec'h, ô Mâm druezus , e lacàn va esperanç
Evit ma em hezo digant Doue asistanç ,
Ma ellin dre ho sicour cavet ar selêrigen
Da explica qement-mâ etouez ar gristenien.

Mont a rân dâ gommanç disclêria en antier ,
Pa ro diò asistanç va Doue hor Zalver ,
Ar maleuriou erruet en escopti Bourdel ,
Er barres eus a Sant-Georch , an üguent a ebrel .

Er barres-sé e voa ur Person , un deu santei ,
A asiste ar beoñien gant ur galon fidel ,
Dre ma voa carguet ar vro a guernez ha miser ,
E soulaje ar paour balamour d'hor Zalver .

Pêvar den maleürus , goude dibî o danve ,
Renoncet da Jesus , abandonet o ene ,
Evit servicha Satan leun a fallagriez
A lacas en o speret da vonet da laçres .

Ar pêvar brigant-mâ a goncluas neuze
 Doht da dy ar Person , pa vouient an doare:
 Gantân ema an alc'hoesiou demeus ar sacristiry,
 Ha ni yélo en nos da laërez an Ilis.

Clêvet pebes ardou o deveus invanlet,
 Abers an drouc-speret evit na vint get anavezet,
 Monj da brena cos dillat, en em guïsca en beviep,
 Ha mont da dy ar person da c'houlien an alusen.

Ar person carantezus q recevas pepze
 Evel memprou da Jesus , en e dy gant carante,
 A roas dezo da goania , iveau en deus o loget,
 Hep consideri ar sonch eus an dud miliguet.

Ous en em gonclui , hep sonjal d'ar repos,
 Neuze int bet savet vardro an anter-nos ,
 Forçet o deus ar gampr elec'h edoa ar mevel,
 Hac o deus-en massacret eus a dolion countel.

Neuze teujont d'ar plac'h coussqet en e guele ,
 O deveus-hi massacret hep caout outi true ,
 Beuset en e goad , astennet var leur an ty ,
 Ha laqet en ur bern hac ar mevel hac hy.

Neuze o deveus pignet ebars cambr ar person ,
 O déveus-én garrotet hep caout compassion ,
 Staguet en ur gador , hac e dreit en tan
 Laçret an alc'houesiou qemeret digantân.

Ha p'o deus bet laëret an oll arc'hantiry .
 Ar pêvar den maleürus a yeas d'ar sacristiry ,
 Croasiou arc'hant , lampr , calizr , ezanceriou ,
 Chapou hac ornamanchou eus an oll auteridou.

Ar pêvar den maleürus gant an diaoul possedet ,
 A yas da attaqi Jesus en tabernacl biniguet ,
 Ar soleil hac ar ciboar o deveus qemeret ,
 An hostiou adorabl o deveus profanet.

Guelomp oll tud devot pere a gar Jésus ,
 O velet eun torfet cruel ha maleurus ,

Peini a laca an cê, an douar da grena;
Sclaci a ra va goad, n'ellân nui explica.

Grena a ra va c'halon o velet an dud maleurus
O foulî gant o zreid cors santel va Jesus;
Ne qua petos Doue na zeud'o supissa,
Pe digori an douar evit crenu o lonez.

Holla! tud maleurus, bourrevien arraget,
Petric rit da gorf Jesus en deveus ho croiset?
Goassoc'h oc'h eguet Judas pehini zo daonet,
Da altaqi var e dron hor Zalver binignet.

Retorn a ra bremâ ar pêyar den cruel
Da zisques d'at pérson an organianchou santel;
En instant ma o guelas e rannas e galon,
Ma conimanças da ober dezo instruction.

An den santel affliget a lavaras dese :
Pa n'och eus aoun razòn, bet ouz justic Doue.
An arach en o c'halon a zo bet antreet,
Hac unan gant ur gontel en deus-éu dibennet.

E benn santel hac e gorf o deveus bet folet
Ebars en un tan bras evit beza dêvet,
O sonjal penaus bigen na vijent disloget :
E vont'aour, hac e arc'hant o deveus bêt laeret.

Mes Doue, ous pehini ne zeus netra cuzet,
A hermetas ma vije o c'brimor anavezet,
Ma teuas eus ar barres daou den en un instant
Da glasq an Autrou Person da gaç ar Sacramant.

An dud-mâ pa veljont an dorojou digoret,
Hac an ty leun a c'hoad, o c'halon zo rannet;
Mont a rejont da avertissa an ell amezeyen,
Ma teuas gañte vardro assambles daou-uguent den.

Pa antrejont en ty, o c'halon zo rannet
O velet an tan bras pisi a voa atomei,
Hac ar Person en e greiz a voa cazi dêvet,
Hac ar plac'h hac ar mevel en o goad astennet.

Garrolet e voent neuze hep caout compassion ,
 Coudet da Libourn ha laqet er prison ,
 Aben seitec dez goude o froces so juget ,
 Dre arrêt ar parlament da veza punisset.

Condaonet oent neuze gant parlament Bourdel
 Da gaout ar guistion evit o c'hrimou cruel ,
 Rostet betec o daotulin , truez oa o c'hlêvet
 O crial , o vouela ; oc'h ansao o fec'het.

Neuze e voent condaonet , ar pêvar den miserabl ,
 Gant torchou alumet da ober amand enorabl ,
 Gant un durques o ivinou dezo a oue tennet ,
 Ha troc'het o biziell , truez oa o c'hlêvet .

Neuze var ar blacen e voent bet cundet ,
 Laqet en o c'herc'hen peb a rochet souffret ,
 Laqet e pêvar dan evit beza dêvet ,
 Huc al ludu anezo gant an avel' guentet.

C'boni , tadou ha mamou en deveus bugale ,
 Desqel-o da veva e carante Doue ,
 Evit goude ar maro ma zeot da repos
 Gant ar Zent hac an Æles e gloar ar barados .



CANTIG SPIRITUEL

Var-sujet Apparition ar VERCHES en Escoppi a Arlois, an devez qenta u vis even er bloa 1768.

Var ton : Guerz Sant Ugen.

Meulet ra vezoo an Drindet , Tad , Mah ha Speret-Santel ,
 Ha c'houi ive , Guerc'hes fidel , pa oc'h eus en em
 appârisset
 Choas etoues ar gristenien , evit gallout o souten .
 Ahoe moc'h eus ganet ho mah ebars ur c'braou dister ,
 Biscoas den en nep carter n'en devo'a enor d'ho quelet .

Nemet er blos-mâ eurus oc'h n'em disquæset, Main
Jesus.

Didostait amâ christenien, c'houi tud devot da Vari,
Da renta ho meuleudi d'ar güir Rouanes souveren;
En escopti a Artois e deveus lajet cals a joa.

Er vilagen eus a Moutier, un den honest bras meurbet,
Pinvidic bras en effet, pehini a gare Doue,
E joa voa da soulagi ar beorien eu o aunnui.

Seulvui ma ro au aluzen, seulvui e cresq e zapre;
Benediction Doue zo varnezân a dra certeu,
Pa soulage ar memprou eus a Jesus, hon Autrou.

An den-mâ en devoa pedet qerent hac amezeyen,
An deiz qenta a even, da zoñt da ober ur banquet
Eus ur e'bontrat en devoa da zimizi ur mab dezâ.

Pa edo ar goimpagnunez tout ous tol o coania,
E teuas da c'houlen loja hor Mam beniguet ar Verc'hes,
Hep beza anavezet, rac paour bras e voa guisqet.

Etre e divrec'h e tougue oll joaüstet au Æle;
Silvidigues ar bed-oll, Jesus-Christ guiv vab da Zoue,
Gant ur visach caër ha charmant, ha paour bras e
viscamant.

En instant m'e deus goulennet digant ar maestr eus
an ty,

Va logit, me ho suppli, evit un nos, mar permetet,
Elec'h ma vo ho polente : paet e viot gant Doue.

An den-mâ leuu a garante en andret ar beorien guez,
En deus lavaret d'ar Verc'bes : ia, hep ma e anaye,
Ia, emezân, deut en ty, u'ho lojo ho mab ha c'houi.

Dre'n dorn en doa-y qemeret ha lajet da azea,
E-tuan à güemeras Jesus hor Zalver beniguet,
D'e laqat var e varlen; hemâ'n enor, christenien!

Seulvui ma sell ar c'brouadur, seulvui caëroc'h er
c'have,

Ravisset voa e enc, e galon zo en plijadur,

Ouz ér gælet qer charmant, qer caér, ha qer ravissant.

E-unan en deveus-y pedet: debret iveau, emea ùn,
Mes hy en trugareca, ne devoa na nabn na sec'het;
Mes calz a blijadurez o velet ar c'hompagunez.

Pa voa ar repas achuet, e c'houlennas dигauti;
Lavarit, me ho suppli, a belec'h oc'h, mar permelet,
Ha pez bano hoc'h hanvet, ieu da belec'h e zet.

A noblañc vras oun, emezi, guinidic a Galilee,
Evit lavaret guirione, a dra sur oun hanvet Mari,
Hac e zon deut gant va Mab.da zigaç eur c'hêlou mad.

Eur mignon a meus, emezi, a dle caout un heritach,
Ha c'hoas ieu davantach, ar propriete demeus e dy,
Pa zeo bet trugarezus en andret memprou Jesus.

Ar re-ze o deus pedet ha gonezet evinta
An heritach ar chaera pehiui a dle da gavet;
Qent m'achuo an eiz de; songit mad e qementse.

An den-mà hep bea sonjet neuze bars er recit-se,
Qer profitapl d'e ene, outi en deveus gouennet
Ha bras voa ar baourente dre ar vro ma tremene.

Peguement benac, emezi, e zeo fachet hon Doue
Ouz ar pec'her, nos ha de ne ra nemet e offanci,
Eo prest c'hoas da rei pardon, ma er goulen a galon.

E bouvoar hac e vadelez zo en tu-all d'ar valij;
Mar meritomp ar suplic, e ma c'hoas leun a vadelez,
Ne vanq: qet da fournissa peadra evit e reva.

Ar gurun eh deus gourdrouset ha fevinet ho tier,
Ar grizill hac an avel o deus isamet ar c'hanter,
Ar glo hac an douar qer bras n'oe guelet enn'an biscoas.

Un nombr bras a vatimanchou a zo collet dre ar mor,
Hep gallout en em sicour, ar maro subit a veler
O caç hoc'h ameseyen d'an douar a dra certen.

En ur guer, brezel ha qernez a veler dre ar c'hanter,
Hac ieu qement maleur pere erru gant ar pec'her,
Zo avertissamanchoù a erra abeuts bon Autrou.

Meñ ya mignon ; me ho suppli , dalc'hit sonch eus
va c'homzou ,
Na dinc' get faribollenrou pere a alse da ziforj ,
Gant Doue int lavaret da ziscleria var ar bed.

Teir bloayez ho po assuret en abondance sa hep traou ,
Qement zo ret da veya an oll a vo rejouisset ;
Guinvis , segal ha pep had , tout e vezò marc'hat mad .
Qement a vezò o commerci a vezò oll rejouisset ,
O velet ane calonec , hep tristidiguez nac annui ;
Ebats e rouantelez Franc e vezò rejouissanc .

Un abondanç a faveurion a zisqenno eus an èe ;
En em rejouissomsp , hirie , Doue a royo deomp e
c'hraçou ;
Goulenact ountañ pardon , ha pedet-én a galon .

Naguemerit get va c'homzou vit fabienaoñ , mar querit ,
Qer quis emeus lavaret , evel ma zeot aben iñi des
Da vit Doue da repos en gloar ar barados .

Honnez ar succession a dleac'h-hu da gadut ,
Evel m'a meus deoc'h lavaret , da Zoue e zoc'h ur quir
mignon ,

O soulagi ar beorien guez e zeot davitan soudan .

Pa voa achuet o parlant gant ur vodesti ar c'haera ,
E bisach carguet a joa evel an heaul a zeuas brillant
E guiscamant caér meurbet , an oll a voa soueset .

Ur c'houes'an excellanta a lacas ebars eu ty ;
Meulet ra viot , Mari , eurus hñas eo tud an ty-mañ
O velet ar vajeste ous a Jesus nñab Done .

En instant e voa anavezet , Jesus hon roue guirion
A roas e venediction da guement voa assamblet ,
E presanç ar gompagnunez e pign en èe gant an Æles .

An den-mañ a voa qen estonet gant quez d'ar
Verc'hes Vari ,
Mantret e galon , na ell mui pa zonch plou en doa guelet ,
Crial rë epad an nos : Mari , va c'hasitt ganeoc'h .

Antronos vintin e varvas an den santel enrus-mâ,
 E enè gant calz a joa'a ya da velet hor Zalver,
 Entre daouard ar Verc'hes sacr, p'en devoa dalc'hete Mab.

E bried hac e vugale gant laouenediguez bras,
 O deus batisset var ar plac ur chapel da Vam hon Doue :
 Ar Verc'hes a drugare a invoquer er plac-se.

Un nombr bras eus a viraçlou a ra er plac santel-mân,
 Qement a ya d'e bisita , oll e recevont e graçou :
 Meulomp Jesus, roue an tron , ha Mari e vam güirion.

Didostait eta, c'hiitenien, güir tud devot d'ar Verc'bes,
 Deut da recita hepidez ar chapelet e c'burunen,
 Grêt a hemzec hoget ros fleurissant er Barados.

O Rouanes ar guerc'heset ha güir Vam d'an Doue beo,
 Pedit ato evidomp evit ma vezimp pardonet,
 Ma ellimp mont da repos hañcho ineuili er Barados.

FIN.



E Montroulez, eus a Imprimeri LÉDAN.